

VAR SAO, BREIZIZ !

War don :

Da feiz hon Tadou koz, ni paotred Breiz-Izel,
Ni zalc'ho mat atao :
'Vit feiz hon Tadou koz, hag en-dro d'he banniel,
Ni holl en em stardo.
Feiz karet hon Tadou, morse ni ho nac'ho,
Kentoc'h ni a varvo (*ter*).

1

Keit ha ma lugerno e bolz uhel an nenvou,
Ar stered hag al loar hag an heol benniguet,
Ni a gerzo divrall gant hent ar gourc'hemennou
Hag a vevo dalc'hmat 'vel gwir gatoliked.

2

Keit ha ma vezo mor da luskellat Breiz Izel,
Da floura hec'h aochou, da bokat d'e reier,
Kristenien e chomimp, en despet d'an holl vrezel
A ray d'eomp an dud fall, marc'hadourien geier.

3

Keit ha ma redo dour en hor steriou dudies
Ha ma kano er c'harz al labousedigou,
Ni 'redo kalonek war roudou santel Jezuz
Hag a gano d'ezan hor c'haera kantigou.

4

Keit ha ma savo brug war gribenn hor meneziou
Ha ma tougo al lann bokedou alaouret,
Morse ne droimp kein da feiz karet hon Tadou :
Ni 'zo eus ar ouenn dud o deus pennou kalet !

An dero bras o stourm ouz an avel kounnaret
 A dorr kent 'get plega, hep chal gant ar maro,
 'Vel-se ni 'zalc'ho penn d'ar bed ha d'an drouk-spered
 Ha ne blegimp biken, kentoc'h ni a dorro !

An ilio rodellet en-dro da c'har ar wezenn,
 Daoust d'an amzer diroll a chom stag mat ato ;
 'Vel-se cuzoc'h, Jezuz, en em stardomp da-viken
 Ha diouz ho karantez netra n'hon distago.

Ni a vo kristenien, neket hepken dre gomzou,
 Met dre an oberou skuilhet en hor buhez :
 Pedenn hag oferenn, vijil ha sakramanchou...
 Ni 'heulio penn-da-benn gwenojenn ar furnez.

Kenavo evit mat d'an holl c'hoariou noazus,
 D'an dansou miliget, a zaon mil ha mil den !
 Na glaskomp ket plijout da Satan ha da Jesus.
 Ne c'hellomp servija nemet eur mestr hepken.

Ni 'zo Bretoned yac'h, dispont e-giz hon Tadou ;
 Birvi a ra ennomp kalon ar gwir soudard.
 Eur Breizad hag a dro da heul ar fals-kredennou.
 N'eo ket eur gwir Vreizard n'eo nemet eun trubard !

Mez eta d'ar c'hrener, d'an trubard ha d'an nac'her !
 Ne deus war an douar netra ken divalo.
 Ni a chomo bodet dindan banniel Hor Salver,
 Atao a-du gantan, er vuhez, er maro !

Mat da veza moulet
Kemper, ar 1 a viz Gwengolo 1929
 P. MESSAGEUR, vikel-vras.